

D'ar 15 a viz Here 2024 / 15 octobre 2024

**Galv loc'hañ ha degouezh Redadeg 2026**  
**Appel à candidature Redadeg: départ et arrivée 2026**

Galv d'en em lakaat war ar renk evit aozañ al loc'hañ pe an degouezh !

Un darvoud breizhat eo Ar Redadeg, aozet war dachenn Breizh bep eil bloaz. Lieslec'h eo ha reiñ a ra lusk da lakaat kement kevredigezh, kement embregerezh ha kement den zo da genlabourat dorn-ha-dorn. Un darvoud dibar eo evit ar re tomm o c'halon ouzh ar brezhoneg hag ouzh e implij pemdeziek. Ar Redadeg a zo he fal talvoudekaat ar yezh, en he finvidigezh hag he liesegezh, dre zastum arc'hant ha kas war-raok raktresoù evit ar brezhoneg.

*L'appel à candidature est ouvert pour l'organisation du départ et de l'arrivée !*

*Ar Redadeg est une course-relais en Bretagne. Organisée tous les deux ans, elle mobilise toutes les associations, entreprises, collectivités ou personnes attachées à la langue bretonne et à son usage. Ar Redadeg est un temps fort de mobilisation pour collecter des fonds, mettre en valeur la langue bretonne, en valoriser la richesse et la diversité et en promouvoir l'usage au quotidien.*

**Redadeg 2026 a vo eus ar Gwener 08 d'ar Sadorn 16 a viz Mae 2026.**

***La Redadeg 2026 aura lieu du vendredi 08 au samedi 16 mai 2026.***

**Prest e vefec'h d'ober war-dro al loc'hañ pe an degouezh e 2026 ? / Prêts à organiser le départ ou l'arrivée de la Redadeg 2026 ?**

Na chomit ket da dortal : savit un darvoud leun a vuhez ha startijenn tro-dro d'hor yezh. Un doare dispar eo evit lakaat war-wel hag enoriñ arzourien ha kevredigezhioù ho pro.

*Que ce soit pour le départ ou l'arrivée de la Redadeg, organiser l'événement, c'est créer un moment privilégié, festif et convivial, largement ouvert autour de la langue bretonne. Une nouvelle occasion de mettre en avant la dynamique et la créativité des associations et artistes locaux, une opportunité de faire découvrir à un autre public un événement existant.*

**Digor eo ar galv d'an holl gevredigezhioù. Mat e vo mont e darempred gant an ti-kêr evit kaout e skoazell. / L'appel est ouvert aux associations qui sont invitées à prendre contact avec leur mairie afin d'obtenir leur soutien pour le projet.**

Evit gellout aozañ mat Redadeg 2026, e fell deomp sevel an hentad an abretañ ar gwellañ. Anat deoc'h hon eus ezhomm gouzout e-pelec'h e krogo an hentad ha davit peseurt kêr ez aio !

*Nous souhaitons travailler au plus tôt sur l'élaboration du parcours, il nous est donc nécessaire de connaître rapidement les villes de départ et d'arrivée.*

**Gortoz a reomp ho respontoù a-benn ar 25 a viz Du 2024 d'an diwezatañ ! / *L'appel à candidature est ouvert jusqu'au 25 Novembre 2024 au plus tard* !**

Goulenn a reomp digant pep framm dedennet respont bremañ d'ar c'houlennaoueg enlinenn war lec'hienn internet ar Redadeg evit deiziañ un emvod etrezomp etre ar 25/11 hag ar 5/12.

*Pour répondre à l'appel à candidature, remplissez le questionnaire en ligne présent sur le site internet de la Redadeg afin de programmer une rencontre entre le 25/11 et le 5/12.*



**Darempred / Contact** : Tifenn Siret - 07 57 55 81 72

tifenn@ar-redadeg.bzh - [www.ar-redadeg.bzh](http://www.ar-redadeg.bzh)

